

# RECIT

*Deus eur miracl burzudus c'hoarvezet gant eun itron vras  
dre brotection Itron-Varia ar Follgoat*

**Voar eun ton trist.**

*Mac'harit Frogil d'he mamm.*

Ma mamm, id evidon d'ar Follgoat,  
Dierc'hen, discabel, voar ho taon  
[droad.

*He mamm.*

Petra a valeur oc'h eus-hu groet,  
D'ar Follgoat pa leret monet.

*Mac'harit.*

Ma flac'hic, ma flac'h a gamp  
E deus lazet ec'h innoçant,  
E deus lazet ec'h innoçant ;  
Hep c'hristenes na badeziant.  
Hen laquet, zivoas ! em goele,  
Eur gontel noaz n'he goste cleiz.  
Allas ! hi a zo achappet ;  
Me evili'vo quemeret !

Oa quet he guir peur achuet  
Archerien en ti zo antreet.  
Trivoac'h archer deus a Raon,  
Trivoac'h all a Lanhuon.  
Da guerc'het Mac'harit d'ar prison.

Cri a vije ar galon ma na voelje,  
Voar hent bras Raon nep a vije,  
O vonet d'ar prizon entre tri,  
Ar buguel n'eur baner dirazi.

Ha ma lere bele ma c'he :  
N'eo quet din ar buguel-ze.  
Ma flac'hic, ma flac'h a gamp  
E deus lazet ec'h innoçant  
E deus lazet ec'h innoçant  
Hep christenes na badeziant,  
Ha laquet nean em goele  
Eur gontel noas n'he goste cleiz.  
Allas ! hi zo achappet,  
Ha me vit-hi zo quemeret.

Mac'harit Frogil a c'houlenne  
Er guer a Raon p'en antree :  
Pelec'h man ar prizon aman  
Ma zei Mac'harit en han.

Ar geolieres a lavare  
Da Vac'harit Frogil neuse :  
Tevet, Mac'harit, na oelet quet,  
Prizon d'ho laquat na vanquo quet.

*Mac'harit.*

Me garfe caout eur messenger  
Da gas evidon eul lizer.

Ar geolieres a lavare  
Da Vac'harit Frogil neuse :  
Srivet ho lizer pa guerfet,  
Messajourien dec'h na vanquo quet.

*Mac'harit.*

Da gas eul lizer d'am maërones  
Merquet voarnezan ar vuirionez.

Pa n'arri al lizer gant he maërones  
E eo carguet a distritiguez,  
Petra bennag ma oa en creiz ar zal  
O canan, o tripall, o tansal.

*Ar paj bian.*

Cetu aze al lizer : lennet-han :  
Merquet ar vuirionez varnezan.

*He maëronez.*

Me na oelfen quet eun daquen  
Vit quelo len eun tam feuillen.  
Voa quet ar feuillen digoret mad  
Ma coez an douer n'he daoulagad ;  
Oa quet al lizer c'hanter lennet  
Ter guech d'an douar eo semplet.

*He maëronez.*

Lequet ma c'haros din voar host  
Ma zin da Raon evit an noz ;  
Lequet seiz a guezec voarnezan.  
Lequet a rog a re voellan.

Ha pa diffe ar marc'h bep cammet,  
Beted Raon renquan monet !  
Ha pa diffe ar marc'h en peb heur,  
Me a renq mont di en ter heur.

Mac'harit Frogil a lavare  
Na oar ar potaus pa bigne :  
Tud ajustis, ma rafac'h o tever.  
C'houi rose din eun tam amze.  
Ann amzer da distrei eun dro,  
Ma-larin deoc'h eur guir pe daou.

Me voel erru ma maëronez  
Assamblez gant-hi eur varonez

Hac eur c'harroz equiped mad,  
Er penn a rog Goerc'hes ar Follgoad.

He méronnez a c'houlenne  
Digant he fillores neuze :  
Petra a valeur ha peus groet  
P'hen doc'h d'ar prizou digasset ?

*Mac'harit*

Ma maëronés, am excusest  
Netra a valeur na meus groet ;  
Ma flac'hic, ma flac'h a gamb  
He deus layet he innoçant  
Hep christenez na badeziant  
Hep christenez na badeziant ;  
Ha laquet nean em guele  
Eur gontel noas ne goste cleiz,  
Allas ! hi a zo achappet  
Ha me ne flas zo quemeret.

Ar vaëronnez a lavare  
D'ar boureo cri neuze :  
Laquet ma fillores er valans  
Me rei he toesans en chevans.

Poezet-hi eur vech ha diou vech,  
Me rei e foezans aour bep guech ;  
Poezanz ma c'haros ha ma c'hezeq,  
Ho foezans diou vech mar be red.

Ar boureo cri a respontas  
D'ar vaëronnez p'he c'hlevas :  
N'en doc'h quet quen caer da varo-  
M'ho pe poezans ho fillores. [nes

Ar boureo cri a lavare  
'Vellen d'he geolier neuze :  
Laquet anezi er poians  
Rac ann heur bepret a avans.

*Ar geplier.*

Bet on ter guech voar he diou seoa  
Ha nemed c'hoarzin ouzin na ra.

*Ar boureo.*

Quemer eur gontel pe eur lançon  
Ha sco anezi dont n'he c'halon.

*Ar geolier.*

Scoet meus hi ter guech enoin,  
Ha met c'hoarzin na ra ouzin.

*Ar boureo.*

Ma, querez ganti d'ar lagoderi :  
Groa eun tantat tan vit e devi.  
Eun tantat tan a dri c'hant queunet  
Mac'harit n'he greiz vo taulet.

He mates a lavare  
D'he c'hamaradez eun de a oe :  
Hirio zo eun devez caer en Raon,  
Lezomp pep tra en abandon.

Guiscomp hon habijou satin glas,  
Deus rafe n'amzer ai ve voas.

En tal an tinn pen d'eo erruet,  
Eur fulven dan a oa lmpet :  
En poultr, en ludu eo rentet.

Mes pe voa an tan achuet  
Mac'harit ne greis so cavel ;  
Dindanni eun habit satin guen,  
Curunen ar Verc'hez bus de fen.

Ar boureo cri a c'houlenne  
Ha digant Mac'harit neuze :  
Mac'harit Frogil, din, loret  
Petra eo d'an tan no teufe quet.

*Mac'harit.*

An tan na ra din droug a bet  
Nag al lançonno quen neubent ;  
An Itron-Varia a Voul-Voen  
Ra d'ann tan diouzin n'em den.

*Ar boureo.*

Mac'harit Frogil din a loret.  
Petra oa d'ar potans n'ho crougue  
[quet.

*Mac'harit.*

Ar potans na ra din droug a bet,  
Nag ar lançonno quen neubent :  
An Itron-Varia ar Follgoat,  
Voa scabel dindan ma daou droad.  
Mes me ha brema d'ar Follgoat,  
O ia, mar gual ma c'halon pad.

Bars er Follgoat pen d'eo arriet.  
Ar c'hleier da zon zo commanset.  
Mac'harit Frogil a lavare  
En chapel ar Follgoat pen daouline :  
Bonjour dec'h emezi, Guerc'hez,  
Bezit evidon avocadez ;  
Me rei dec'h croas, ha bannier,  
Ha guisquamant d'ho ter oter.  
Me rei dec'h eur gouris coar  
Hac a rei ter dro d'ho holl douar.  
Ter dro diavez, ter dro diabar  
Dont d'allumin oar an oter vraz.  
Me rei dec'h eur bannier voen  
Seiz cloc'h arc'hant ouz he frejen.  
Ha rubano sei ous o derc'hel.  
Voa quet he gir peur achuet  
En chapel ar Follgoat eo decedet.

Homan eo guerez Mac'harit Frogil :  
D'ann nep en goar ez eo fassil.  
Nep e jileo gant attention  
En deus daou c'hant devez pardon ;  
Nep e c'han en deus ouspenn  
Joa ann Envou, mar e goulent !

(Propriété).